

# Simone Weil

## Ar santez emsaverez

### 1909-1943



«*Simone Weil est le seul grand esprit de notre temps*»

*Albert Camus, embanner pennoberenn Simone Weil  
“L'Enracinement” e 1947*

***Stumm kentañ ar studiadenn a vo adwelet war-lerc'h ar gaozeadenn***

# He buhez

- Ganet e Pariz d'an 3 a viz C'hwevrer 1909 en un tiegezh a orin yuzev (Elsas a-berzh he zad, Rusia a-berzh he mamm). C'hoar da André Weil, matematikour brudet. Ur familh desket hag unanet.
- ENS hag Agrégation Prederouriezh e 1931.
- Kelennerez e kemer perzh er CGTU (kommunour hag anarkour) Skivañ a ra e Revolution Prolétarienne. E 1933 e komz gant Troski war-eeun. *Hegaset eo bet eñ gant goulennoù ar plac'h yaouank.*
- 1934 ec'h a da vicherourez e Alstom ha Renault.
- 1936 Brezel Spagn – 2 viz
- 1942 Labour war ar maez e menaj Gustave Thibon (Ardèche)
- 1943 Marv e Londrez ma laboure evit ar France Libre

# Darvoudoù pennañ en he buhez (1)

- **He labour micherourez e 1935:** Dister he yec'hed eo start-tre ar prantad-mañ dezhi. Brevet he c'horf e rankas dilezel he labour goude ur bloavezh. Anavezet he deus ar faezhded hag ar boan met leugnet eo bet gant ar blijadur da grouiñ diwar-bouez he daouarn. Krog enni ar Gwaziennañ.
- **Ar brezel-Spagn e 1936:** Petra an diaoul eo aet d'ober en ar brezel diabarzh-mañ? Anavezet he deus krizded mab-den, ar blijadur da lazhañ evit lazhañ, an droug gwashañ. Pep tra zo bet skrivet en he lizher da Jorj Bernanos (1938) a gaver war internet. Erbediñ a ran deoc'h he lenn, ur c'haer a lizher: Setu an ton:

*“Depuis que j'ai été en Espagne, que j'entends, que je lis toutes sortes de considérations sur l'Espagne, je ne puis citer personne, hors vous seul, qui, à ma connaissance, ait baigné dans l'atmosphère de la guerre espagnole et y ait résisté. Vous êtes royaliste, disciple de Drumont - que m'importe? Vous m'êtes plus proche, sans comparaison, que mes camarades des milices d'Aragon - ces camarades que, pourtant, j'aimais.”*

Didouellet e oa bet da vat.

# Darvoudoù pennañ en he buhez (2)

- Ar brezel hag he labour war ar maez: e 1941 e skriv an Tad Perrin, mignon dezhi, da Gustave Thibon evit ma vefe degemeret Simone Weil en e venaj en Ardèche : « *Elle est exclue de l'université par les nouvelles lois et désirerait travailler quelque temps à la campagne comme fille de ferme* » Lezel a raio kaieroù gant Gustave Thibon a vo embannet goude ar brezel “La pesanteur et la Grâce”. Lizher gant fent da Xavier Vallat, kommiser e Vichy e karg eus aferioù ar Yuzevien, evit klemm a-enep lezennoù Vichy e-keñver ar yuzevien.
- Prantad e Marseille: Eskemmoù fruezhus ha digor gant an Tad Perrin e 1942. Bodañ a ra skridoù war Doue e gresianeg kozh (he yezh a galon) hag e sanskrit. Studiadennou e-leizh hag a vo embannet goude ar brezel.
- Prantad berr er Stadoù Unanet m'eo bet kaset he zud ganti



- “Rédactrice” er France Libre e Londrez adal Miz Du 1942: Fellout a ra dezhi bezañ harzhlammet e Frañs evit ober un dra bennak war an dachenn. Nac'het eo bet dezhi. Debiñ a ra nebeutoc'h-nebeutañ betek m'en em gavas brevet he c'horf. Skrivet “L'enracinement” ganti e varvas en eost 1943.

# An Hollved evel m'emañ gant Simone Weil

*Betek he marv e vo Simone Weil war evezh eus ar bed: "l'attention"*

**"Non pas comprendre des choses nouvelles, mais parvenir à force de patience, d'effort et de méthode à comprendre les vérités évidentes avec tout soi-même"**

3 frantad a c'heller distagañ en he buhez:

- **Ober gant an nerzh, betek 1936 (brezel Spagn)**

*Kompren plas an energiezhouù er gevredigezh, dielfennañ labourioù Marks, disklaeriañ emzalc'h Stalin hag Hitler*


- **Ober gant an dinerzh betek ar brezel**

*Mont betek penn an dinerzh hag emgav gant ar C'christ (1938)*

- **Peoc'h kavet en amzer dremenet hag hiraezh d'ar stourm**

*Dont en-dro d'ar brededourien rak-sokrat (Hellaz, Ejipt, Indez, ...)*

# An Hollved evel m'emañ gant Simone Weil (prantad 1941-1943)



- **An hollved a zo bet krouet gant Doue met dilezet eo bet a-grenn digantañ evidomp. N'eus tamm Mad ebet er bed-mañ rak neuze e vije leuniet gant Zoue.**

Doue a vod ennañ ar Mad (ar gwir Vad), ar Wirionez hag ar Gened

- **Lavar ha Dislavar er bed patatez-mañ “Tout bien véritable comporte des conditions contradictoires, et par suite est impossible”**

**“Aucun progrès n'existe en ce monde” emezi**

# Trajediennouù Hellaz: ar pennaeñnoù a zo bet maget spered Simone Weil ganto

## Antigone hag ar Garentez

Daou vreur da Antigone zo marvet e-kerzh seziz Teb, unan o tifenn ar gêr hag egile, Polinis e anv, o tagañ he mogerioù. Urzhiet e voe gant Kreon, Roue Teb, e veze lezet korf Polinis d'ar brini; ar pezh n'hall ket Antigone asentiñ. Kondaonet eo d'ar marv evit bezañ douaret korf he breur daoust da lezenn Kreon. Aet eo Antigone dreist da lezennoù kêr Deb dre ar Garentez, ar wir Garentez.

Ar garentez, ar gwir, ar gened, ar justis, ar mad: un dra nemetken ha n'he deus ket ezhomm eus lezennoù (lezenn ar Geoded pe lezenn an Natur) evit bezañ anavezet

# Simone Weil hag an hollved: Le rapport des choses

***“Ce monde en tant que vide de Dieu est Dieu lui-même”***



Koumoulegor Pennmarc'h  
gwelet gant EUCLID/ Gwazva  
Egorel Europa

“S'identifier à l'univers même. Tout ce qui est moindre que l'univers est soumis à la souffrance. J'ai beau mourir, l'univers continue. Cela ne me console pas si je suis autre que l'univers. Mais si l'univers est à mon âme comme un autre corps, ma mort cesse d'avoir pour moi plus d'importance que celle d'un inconnu. De même mes souffrances.”

*En den, n'eo ket ar Person (blev hir, daoulagad glas, kroc'henn du, gwenn, ...) a gont evit Simone Weil met ar pezh a zo Dibersonel ennañ.*

# Simone Weil hag ar Justis



**JUSTIS a c'houlenn Simone Weil**  
**dalc'hmat evit ar re vunut, ar re n'hallont**  
**ket sevel o mouez.**

- **Pa vez graet ur mad war an tamm-douarmañ e teu un droug da heul (1789/1793, ....); “nécessité des contraires”.**
- **Arabat kontañ war ar strolladoù politikel (Note pour la suppression des partis politiques, ...).**
- **Ar Justis a zeuio eus an doujañs, ar garentez, hag eus ar wirionez**

Ar MAD zo, met n'en deus netra da welout gant ar mad a anavezomp (mad dister). Hennezh a zeu a-berzh Doue. Ar re baourañ ac'hanomp zo evel **ar C'hrist, dilezet gant o c'heneiled, dilezet gant o zud, kondaonet gant ar gevredigezh, marv ouzh ar groaz evit bezañ gwelet gant an holl.**

# Gwaziennañ en douar hag en neñv?



"Seule la lumière qui tombe continuellement du ciel fournit à un arbre l'énergie qui enfouit profondément dans la terre ses puissantes racines :

L'arbre est en réalité enraciné dans le ciel !"

# Penaos grwiziennañ en neñv ? Labour an dorn

**“Le travail physique, bien qu'il soit une peine n'est pas par lui-même une dégradation. Il n'est pas de l'art ; il n'est pas de la science ; mais il est autre chose, qui a une valeur absolument égale à celle de l'art et de la science. Car il procure une possibilité égale pour l'accès à une forme impersonnelle de l'attention”.**


**“Le secret de la condition humaine, c'est qu'il n'y a pas d'équilibre entre l'homme et les forces de la nature environnantes qui le dépassent infiniment dans l'inaction; il n'y a d'équilibre que dans l'Action par laquelle l'homme recrée sa propre vie par le travail”.**

**“Travail manuel. Le temps qui entre dans le corps. Si l'on est épuisé, c'est devenir soumis au temps comme la matière”**

**“Les travailleurs ont besoin de poésie plus que de pain. Besoin que leur vie soit une poésie. Besoin de lumière d'éternité.”**

*Simone Weil n'eo ket evit ijinañ e c'hall ar sport kemer plas al labour. Marteze peogwir ne vez ket savet pezhioù arz dre ar sport. Re dost ouzh an nerzh emañ ar sport eviti.*

# Penaos gwriziennañ en neñv? Ar matematik: kaerded ar bed all en hon hini



A viskoazh e oa bet boemet Simone Weil gant ar matematik,. Laouen, e heulie kaozadennou he breur hag e geneiled (strollad Bourbaki).

- **“Mathématique: une sorte de poème mystique composé par Dieu lui-même”**
- **A-unan gant ar Bitagorisianed, “Tout est nombre” eme Simone Weil**
- .

**“La douceur qui est l'essence de la brutalité de la matière, c'est elle qu'on trouve, qu'on saisit expérimentalement au fond de la souffrance, comme on la contemple par la pure intelligence dans la mathématique, comme on s'en nourrit dans tout ce qui est beau.”**

*En he meuleudioù d'ar matematik e tiskouez Simone Weil he fealded da dalvoudegezhioù ar gevredigezh en Hellaz kozh: Skiant, arz, ha Relijion*

A-benn gouzout hiroc'h "Simone Weil et la Mathématique" gant Laurent Lafforgue (Medalenn Fields 2002 roet dezhañ) <https://www.laurentlafforgue.org/textes/SimoneWeilMathematique.pdf>

# Ar “geometri” hag an “Aljebr”

•

*Enebiñ a ra an Aljebr ouzh ar Geometri ( a zo ur wir dalvoudegezh ennañ)*

**Dont a ra allies war ar sujed a-hed he zestennouù**

**Petra eo an Aljebr evit Simone Weil?**  
**Kemeromp skouer div eeunenn genstur bet treset ganin**  
**war an tu kleiz**

Daou zoare zo da welet an div eeunenn-mañ

- Evel linennoù a c'hallje bezañ bet treset gant un tamm kleiz war un daolenn sklent, ne vern, skeudennouù traezennoù geometrek int ha traken.

- Evel  $Y_1 = aX + b_1$  ha  $Y_2 = aX + b_2$ ;  $X \in R$ . Neuze Petra eo R?

R zo un hollad a zo, diwar termenadur Kantor, e elfennoù “heñvel ouzh” klasadoù heuliadoù Cauchy a gevrennoù (“classes d'équivalence de suites de Cauchy”). Un heuliad Cauchy zo un heuliad a zo tostoc'h-tostañ e elfennoù bep ma c'h eont pelloc'h davet an didermen. Sklaer eo? Daoust ma'z eo kaer termenadur Kantor peogwir e vez deveret R eus Q (hollad ar c'hevrennoù), ar pezh en dije roet plijadur vrás d'ar Bitagorisianed, e welomp buan ne vo ket aesoc'h a se mennozh an div eeunenn genstur. Kroget hon eus e-giz-se en “Aljebr”. Re allies e vez graet gant an Aljebr hervez Simone Weil

# Arn Naouegezh Artifiel: ur skourr d'an “Aljebr”

***An Naouegezh artifisiel (IA e galleg) a veze graet “Algèbre” diouti gant Simone Weil.***

- “Algèbre moderne : substitution du signe au signifié”  
*en IA an testennoù zo heuliadoù lizherennouù deuet diwar stadegoù*
- “Travail moderne : substitution du moyen à la fin.”
- “Algèbre : la méthode se trouve dans les signes, non dans l'esprit.”
- “Machine : la méthode se trouve dans la chose, non dans l'esprit.”

# En-dro d'he fennoberenn L'Enracinement

**N'eo ket bet skrivet testenn Simone Weil dindan an titl-mañ. Skrivet e oa bet ganti “Prélude à une déclaration des devoirs envers l'être humain”. Ret eo soñjal e oa o labourat evit sevel ur skrid-diazez da reiñ ur vonreizh nevez d'ar Republik goude ar brezel. Roet eo bet an titl nevez gant Alberzh Kamus evit lakaat splannoc'h dalc'h an destenn war ar c'hentañ sell.**

- Goulenet e oa bet da Simone labourat war “Les droits de l'homme” met diouzhtu e eilgerias “La notion d'obligation prime celle du droit, qui lui est subordonnée et relative. Un droit n'est pas efficace par lui-même, mais seulement par l'obligation à laquelle il correspond”. Setu amañ roet an ton!
- Da gentañ e tispleg ezhommoù ar c'horf hag ezhommoù an ene. Kentañ ezhomm an ene eo an urzh. “Le premier besoin de l'âme , celui qui est le plus proche de sa destinée éternelle , c'est l'ordre; c'est à dire un tissu de relations sociales tels que nul ne soit contraint de violer des obligations rigoureuses pour exécuter d'autres obligations”. 15 poent zo en holl: Liberté, obéissance, responsabilité, égalité, ..., enracinement.
- “L'enracinement est peut-être le besoin le plus important et le plus méconnu de l'âme humaine. C'est l'un des plus difficiles à définir. Un être humain a des racines par sa participation réelle, active, et naturelle à l'existence de collectivités qui conservent vivants certains trésors du passé et certains pressentiments d'avenir.

# Gwirioù ar strolladoù dre gwirioù an den Pa oa o skrivañ “L'Enracinement” e skrive Simone Weil war an dro “La Personne et le sacré”

- “Non seulement la collectivité est étrangère au sacré, mais elle égare en en fournissant une fausse imitation.”
- “ On doit du respect à une collectivité, quelle qu'elle soit – patrie, famille ou tout autre – non pas pour elle-même, mais comme nourriture d'un certain nombre d'âmes humaines”.

# Ha penaos bevañ hervez Simone Weil ?

**Ganet en un tiegezh a orin yuzev ha dizoue, anarkourez ha kommunour e oa bet.**

- “Aucune fin ne justifie jamais n'importe quels moyens” E gwirionez, n'eus ket zoken eus ur fin gwirion nemet ar garentez hag ar mad.
- Pep tra a zo bet bevet, soñjet, ha skrivet gant ar c'hresianed kozh. Er brezelioù a-vremañ e c'houzañv mab den ar pezh a zo bet gouzañvet en “Ilias”. En ur zistrujañ keoded Troie eo o ene dezho o-unan a zo bet distrujet gant ar c'hresianed kozh. Troie a vo orin o dismantr. Her gouzourt a raent en Odiseenn (gant doareoù heñvel e sanskit ar Mahabharata)

**Gant ar C'hrist e c'halle Simone Weil klozañ he dielfennadur eus an hollved.**

**Koulkoude n'asantas ket mont betek ar vadeziant eviti. Eglise Romaine, Romaine vous avez dit? Rome! Rome! Force et Effroi! De toute façon: “ma personne n'est rien” ...**

# An amzer dremenet



Kalon Plouha Simone Weil eil kaozeadenn, Stumm 1 2024

# **Gouzout ober diouzh an Amzer dremenet du bon usage du Passé**

Dans cette situation presque désespérée, on ne peut trouver ici-bas de secours que dans les îlots de passé demeurés vivants sur la surface de la terre. Ce n'est pas qu'il faille approuver le tapage fait par Mussolini autour de l'Empire romain, et essayer d'utiliser de la même manière Louis XIV. Les conquêtes ne sont pas de la vie, elles sont de la mort au moment même où elles se produisent. Ce sont les gouttes de passé vivant qui sont à préserver jalousement, partout, à Paris ou à Tahiti indistinctement, car il n'y en a pas trop sur le globe entier.

## ar “Progrès” (an Araokaat)

- “L'opposition entre l'avenir et le passé est absurde. l'avenir ne nous apporte rien, ne nous donne rien; c'est nous qui pour le construire devons tout lui donner, lui donner notre vie elle-même. Mais pour donner il faut posséder, et nous ne possédons d'autre vie, d'autre sève, que les trésors hérités du passé et digérés, assimilés, recréés par nous.”
- “La perte du passé, collective ou individuelle, est la plus grande tragédie humaine et nous avons jeté le nôtre comme un enfant déchire une rose.”
- “Croire en l'histoire officielle, c'est croire des criminels sur parole”

### Istor ha Kened

**Le beau enferme, entre autres unités des contraires, celle de l'instantané et de l'éternel.**

# An diwiziennañ aboe bloavezhiouù Simone ?

Bloavezhiouù 1930

## Ar Gouerien

Gwriziennet c'hoazh met o koll o speredelezh a nebeudoù  
Dilezet en em sentomp e-keñver ar vicherourien hag ar vourc'hizien

## Ar vicherourien

Diwiziennet e stalioù bras (Taylor)

## An Trevadenniñ en e washañ.

Diwiziennet e oa bet an drevedennourien (Korsiz, Breizhis en o servij ) kenkoulz hag ar re Trevadennet

## Ur stad kreizennet

JAC  
(Jeunesse Agricole Chrétienne)

JOC  
*Prantad aour berr*

Diwiziennet int bet da vat nemet hiniennouù

**Gwrizionnet muioc'h** dre o stad hag o ardivinkoù nevez. Stummadur dibaouez zo hiziv; un dra pell gortozet gant Simone Weil.  
N'eus ket kalz ken anezho evelkent.  
E Breizh eo start c'hoazh er gounezvouederez ma kaver muioc'h-mui a labourerien estenvro.

Diwiziennet eo an holl gant **ar bedelaat** hag an divroañ

Un digreizennadur melestradurel nemetken (ar mille-feuille administratif" traken). N'eo ket bet digreizennet ar speredoù- **Aljebr!**

# Ha peseurt dazont hervez Simone Weil ?

**“D'où nous viendra la renaissance, à nous qui avons souillé et vidé tout le globe terrestre?**

**Du passé seul si nous l'aimons.”**

*Evit stourm a-enep kemm an hin e vez implijet, re alies ha divergont, doareoù an Aljebr. “Stop” eme Simone Weil. Gweloc'h deoc'h chom a sav ha prederiañ eget kas war raok diskoulmoù a c'hall bezañ gwasoc'h c'hoazh eget an droug a orin*

*E-barzh ar Central Brittany Journal eus Mezeven 2023 e lenner ur pennad poellek war glask diskoulmañ kudennoù an endro a anavezomp hiziv (kemm an hin, saotradur an douar, ...). Ennañ e vez lakaet war well an ezhomm eus “ecological solutions to ecological problems”.*

*Bez' eus tud c'hoazh e Breizh a zo o spered  
a-unan gant hini Simone Weil!*

***Ha gwell a se!***

# Levr lennadurezh verr

- Réflexions sur la guerre (1933, revue La Critique sociale)
- Allons-nous vers la Révolution Prolétarienne ? (1933)
- Réflexions sur les causes de la liberté et de l'oppression sociale (1934, revue "La révolution prolétarienne")
- La Condition ouvrière (1937)
- Quelques réflexions sur les origines de l'hitlérisme (1939)
- Note sur la suppression générale des partis politiques (1940)
- La Pesanteur et la Grâce (1940-1942)
- Cahiers (1940-1942)
- Intuitions pré-chrétiennes (1941-1942)
- L'Enracinement (1943)